

Aotrou Doue, Setu-me dirazout
Ya, me eo o tont deus Breizh-izel.
Va sac'h a zo pounner a rimadelloù
glac'har ha daeloù.
Baleet am eus betek ho pro veur :
Feiz, na pebez beaj hir !

Baleet am eus :

An hentoù bras a gane er chapelioù,
Ar sent a zañse er pradeier,
E-touez an derv e kerzhe ar c'halvarioù.
O ! pardonioù ar bobl ! O ! va bro !

Ha setu-me amañ, Aotrou Doue,
Dirak ho fas santel,
O kestal ur c'hornig Baradoz.

Ken nebeut a blas a gemerin :

Setu ar c'hras a aspedan ac'hanoc'h
Da reiñ d'ar paour-kaezhig ma'z on.

Dre ar gegin war ar brank,
Dre ar ganenn ziwezhañ,
Dre vurzhud an eost,
Dre ar joa 'barzh ar c'hrañj,
Dre an avel o tihunañ,
Dre an deiz o tispakañ,
Me ho trugareka

Da vezañ bet, e tarzhadenn veur ho krouadelezh,
Ur paour-kaezh den marvel doueel ha truezus asamblez,
Netra nemet un den,
E-touez ar miliardoù hag ar miliardoù all deus ho krouaderien.

Bremañ da zelioù ha da zaouarn an natur dener

Da glozañ din va daoulagad.

Set Aotrou Doue, na boant 'oa ar vrezeg em Breizh-izel
in las 6